

# UN EILBABIGOUR E BREZHONEG

Fellout a ra deoc'h en em ouestlañ d'ur raktres dibar ha nevezus a lakay ar brezhoneg war wel evel un ostilh da skoazellañ ha diorren al liesseurted sevenadurel. Dedennet oc'h gant kas ar brezhoneg war-raok hag emskiantek ouzh an dalc'hoù liammet gant diorren an divyezhegezh abred. Ha kinnig d'ar vugaligoù, forzh pe orin e vefe o hini, an endro ma kreskint en o bleud diouzh ar gwellañ ma c'haller, eo ar pezh a blij deoc'h da gentañ-penn war ho micher. Evit seveniñ ar c'hefridioù-se e-barzh ar vagouri vrezhonek kevredigezhel a 15 plas, emaomp o tuta un eilbabigour.

## KEFRIDI

Ho pal, evel eilbabigour ar vagouri, a vo kemer perzh e divorfilañ ar vugale en ur zoujañ d'o lusk ha d'o ezhommoù.

- ✓ Bezañ atebek dindan ar renerez war kalite an doare ma vo kemeret ar vugale e karg ha graet war-dro al liamm gant o familhoù,
- ✓ Ober war-dro pourvezered al liesdegemer (predoù, produoù a-fet yec'hedrezh,...)
- ✓ Kenurzhiañ ar skridaozañ evit an holl deulioù reoliek, dindan atebegezh ar renerezh,
- ✓ Kelaouiñ ar skipailh hag ar familhoù war ar reolennoù yec'hedel
- ✓ Kaout ur sell hollek war ar strollad evit ma vo ar vugale en o aez hag evit ma vo lusket ar strollad,
- ✓ Merañ degemer hag azasadur ar vugale nevez hag o familh ;
- ✓ Bezañ gwevn hag en em ober diouzh pep degouezh evit degemer ar vugale,
- ✓ Kemer perzh e kempenn lec'hel ar vagouri, e luskañ buhez ar c'hevredigezhioù, ijinañ oberoù endro d'al lusk-se, kas war-raok ar modoù kenlabourat...

## TALVOUDOÙ LIAMMET

- ✓ Degemer pep hini en ur zoujañ d'e istor, d'e sevenadur ha kaout ur sell madelezhus war kement tad pe mamm, bugel ha den a-vicher,
- ✓ Ambroug ar raktres evit a sell ouzh e berzh harpañ ha diorren ar brezhoneg
- ✓ Ambroug pep bugel war hentoù an deskiñ, en ur zoujañ d'e lusk, hag ivez tud ar vugale hag a fell dezho magañ o freder endro d'o roll tad pe vamm.

## AN DEN KLASKET

- ✓ Brezhoneger-ez oc'h,
- ✓ Gant an diplom Eilbabigour bugaligoù,
- ✓ Gouest oc'h da gas ho labour o kenlabourat gant kendivizerien lies,
- ✓ Krouiñ liammoù etre ar vugale, ar familhoù, an dud a-vicher hag an dud a-youl-vat

## DA C'HOUZOUT

- ✓ Framm : SKED – Kevredigezh hep pal kenwerzhel
- ✓ Lec'h : Skol publik Kergaouiad – 22 straed Liège – Brest (29)
- ✓ Kevrat : KDP (kevrat didermen he fad) – leunamzer - Emglev alisfa
- ✓ Deiziad deroù ar gevrat : 03 a viz C'hwevrer 2025
- ✓ Gopr : hervez ar skiant-prenet



# AUXILIAIRE DE PUÉRICULTURE EN LANGUE BRETONNE

Vous êtes concerné·e par le développement de la langue bretonne et conscient·e des enjeux liés au développement du bilinguisme précoce. Avant tout, votre première satisfaction professionnelle est d'offrir le meilleur cadre possible à l'épanouissement du jeune enfant, quelque soit son origine sociale. Pour assurer ces missions au sein de notre crèche associative en langue bretonne de 15 places, nous recrutons une auxiliaire de puériculture.

## MISSIONS

Votre objectif en tant qu'auxiliaire de puériculture, sera de contribuer à l'éveil des enfants dans le respect de leur rythme et de leurs besoins, notamment au regard des règles sanitaires et d'hygiène. Pour ce faire, vous adhérez aux valeurs du management participatif et maîtrisez les règles et normes sanitaires et d'hygiène propres aux EAJE.

- ✓ Accueillir et prendre en charge les enfants (y compris les enfants en situation de handicap ou atteints d'une maladie chronique) dans de bonnes conditions, en accord avec le projet éducatif, en lien avec une équipe pluridisciplinaire,
- ✓ Accompagner l'enfant dans son développement, dans ses apprentissages, dans son acquisition de l'autonomie et dans sa socialisation en organisant des activités d'éveil, de loisirs, et d'éducation (jeux, sorties, relations de groupe...) en lien avec l'éducatrice de jeune enfant,
- ✓ Information de l'équipe et des familles sur les règles sanitaires en vigueur
- ✓ Prendre en charge les besoins physiques, physiologiques et psycho-affectifs de l'enfant (alimentation, hygiène, nursing, sommeil, contact, relation...) et contribuer à son bien-être
- ✓ Entretien d'une relation de confiance et de coopération avec les parents,
- ✓ Participer aux tâches courantes de la structure (entretien, préparation des repas, organisation...) et contribuer à la propreté et au rangement des locaux et matériels,
- ✓ Assurer la gestion des stocks (produits d'hygiène).

## VALEURS

- ✓ Accueillir chacun dans le respect de son histoire, sa culture et poser un regard bienveillant sur tous les parents, les enfants et les professionnels,
- ✓ Accompagner le projet dans sa dimension de soutien et de développement de la langue bretonne,
- ✓ Accompagner chaque enfant sur les chemins de l'éveil dans le respect de ses rythmes ainsi que les parents qui souhaitent développer leur réflexion autour des fonctions parentales.

## PROFIL

- ✓ Langue bretonne parlée,
- ✓ Titulaire du diplôme d'État d'Auxiliaire de Puériculture,
- ✓ Vous êtes capable de travailler de manière collaborative avec des interlocuteurs multiples,
- ✓ Vous aimez créer du lien entre les enfants, les familles, avec les professionnelles et les bénévoles,

## CONDITIONS

- ✓ Structure : SKED - Association à but non lucratif
- ✓ Localisation : Ecole publique de Kergaouyat - 22 rue de Liège - Brest (29)
- ✓ Contrat : CDI - plein temps - Convention alisfa
- ✓ Date de début du contrat : 03 février 2025
- ✓ Salaire : Personnalisé suivant expérience



CV & LETTRE DE MOTIVATION :  
DEGEMER@SKED.BZH AVANT LE 10 JANVIER 2025  
SKED : 02 98 80 26 71